

# Kantik Introun Varia Prateoulm

## PLOUGOULM

### DISKAN

*Mirit ho pugale,  
O Guerc'hez Prateoulm,  
Mirit korf hag ene  
Kristenien Plougoulm ;  
Klevit hor pedennou,  
Introun Varia  
Ha scuillit ho kraçou  
Var an oll ama.*

#### I

Chapel Prateoulm dre holl brudet,  
Bet savet er pemzek-kantvet,  
Diskaret hed an dispac'h braz  
Hirio zo ken kaer ha biskoaz.

#### II

Hon tadou n'euz ho tibabet,  
Mari, evit ho fatrounez ;  
E neb bro all n'ho peuz kavet  
Biskoaz teneroc'h karantez.

#### III

Testeni euz ho madelez  
Stag euz mogeriou ho chapel,  
D'an hool a lavar, o Guerc'hez,  
Oc'h euz d'ezho roët skoazel.

#### IV

O Mari, mam a drugare  
Holl ho karomp, ni plougoulmiz ;  
Grit, ni ho ped, en han' Doue  
Ma talc'himp stard bepred d'hor feiz.

#### V

Evel ho zadou koz guechall  
Plougoulmiz niveruz meurbet,  
O c'houlen ouzoc'h ho dioual,  
Ama bepred vez daoulinet.

#### VI

Ar zondardet, martolodet,  
Du-hort en harlu prizouniet  
Ouzoc'h o deuz n'em erbedet,  
D'ezho skoazel o peuz roet.

## VII

Anaoudek betek ho maro,  
 Ar brizounerien, o Mari,  
 Oll a greiz-kaloun a gano  
 D'eoc'hui bennoz ha meuleudi.

## VIII

Chapel Pratacoulm, o mam garet,  
 Goude ar brezel nevezet  
 D'an oll vezo eun testeni  
 Euz ho karantez 'vidomp-ni.

## IX

Pardoun kenta chapel Pratacoulm  
 Gant an oll hanvet pardoun mud ;  
 Vel o tiredet da Blougoulm  
 Da zul an Dreindet eur bobl tud.

## X

D'an eil a viz gouere beb bloaz  
 Eur pardoun all zo kaeroc'h choaz ;  
 An offern neuze vez kanet  
 Var eun aoter er meaz savet.

## XI

D'ho meuli Rosko, Plouenan,  
 Sibiril, Ploueseat, Kastel,  
 Santec, Mespaul, Trélaouenan,  
 Ha Kleder zired d'ho chapel.

## XII

O Guerc'hez Pratacoulm, o Mari,  
 Mam ken gallouduz ha biskoaz,  
 Varnezho koulz ha varnomp-ni.  
 Ni o ped, taolit eur zell c'hoaz.

## XIII

Pa dremenimp euz ar vuez,  
 Neuzè bezit en hor c'hichen,  
 Vit hor zikour, mam a druez  
 Da beure'hounit hor c'hurunen.

## XIV

Hag eüruz goude ar maro  
 Ni holl ho pugale, Mari,  
 Ganeoc'h en Env ni a gano  
 Da Jezuz bennoz, meuleudi !

IMPRIMATUR :

Quimper, le 20 Juin 1927

P. JONCOUR,

v. g.